

# Gwerz nevez savet gant eur zoudard yaouank diwar-benn e vuhez

C'hoant am eus da zisklêria eul lod eus va buhe  
Pehini 'm eus tremenet beteg an de hirie,  
Aboue m'em eus kuitaet va mam ger ha va zad  
Gant kalz a dristidigez... Na pebez kalonad !

Me 'zo eur zoudard yaouank eus ar bloavez pemzek,  
Hag a zo aet d'ar brezel er bloavez pevarzek  
Ablamour d'ar Brusianed, 'oa falvezet d'ezo  
Dont, evel chas kounnaret, da zistruji hon bro.

Met, dre c'hras 'n Aotrou Doue hag ar Werc'hez santel,  
N'int ket deut tre 'barz ar vro hep kavout d'o herzel  
Soudarded leun a galon, tud ha ne spontent ket  
Rak kanoliou Gwitherm Daou, rak mindrailherezed.

En emgann brudet, ar « Marn », dre eur c'hras eus an Nenv,  
Hon zoudarded e deus graet da Wilherm mont war-drenv  
En desped d'e vourrevien pere n'espernent ket,  
D'o merzeria, ar re goz, bugale ha merc'hed.

Met ni ivez, tud yaouank, n'omp ket bet espernet  
Evit talvezout d'ezo evel ma oa dleet ;  
Neuze, 'vit dont da zikour e renkas diredek  
Daou eus ar c'hlasou yaouank, pevarzek ha pemzek.

Er bloavez-se, pemzek de goude Gouel an Holl-Zent,  
Da ziv eur goude kreisteiz, e renkis mont en hent,  
Ha tri asamblez ganin eus va c'hamaraded  
Hag a oa ivez 'veldoun eus parroz Lokeffret.

Pa voemp savet 'barz an tren 'n em lakjomp da gana,  
Daerou en hon daoulagad, muioc'h c'hoant da ouela ;  
Nemet klaskemp frealzi hon c'herent glac'haret  
'Oa o vont da zilezel mibien muia-karet.

-- « Ha ni, bet poan o sevel beteg an de hirio,  
« Rankimp dont d'o dilezel marteze 'vid atô ! » --  
-- « An esperans, gwell a ze, 'vidomp n'eo ket kollet ;  
« Kement a ya d'ar brezel ne vezont ket lazet. »

« Setu e kêr an Oriant breman 'renkomp monet,  
« War ar vicher a zoudard evit beza desket ;  
« Gwell a ze ne vezimp ket kaset pell diouz ar gêr ;  
« Ni a zeuio d'ho kwelet eur wech dre an amzer ! » --

Pevar miz 'm eus tremenet e-barz an Oriant,  
Ken voen galvet evit mont en eun « detachamant » ;  
Pez a reas d'in neuze ar muia poan-spered,  
N'oa nemet tri ac'hanomp hag a oa bet galvet.

\* \* \*

Hag aboue an devez-se kalz traou 'zo tremenet.  
Unan eus va mignoned 'zo bet, siouaz ! lazet ;  
Ar re-all, tizet o zri ! Nemet, dre c'hras Doue,  
A-greiz an dir hag an tan 'omp chomet e buhe.

Ya, setu tremen tri bloaz, pa zeuan da gompren,  
Emomp 'barz an « trancheou », o c'houzanv poan, anken ;  
Kalz a draou, er mare-ze, kalz a draou 'm eus gwelet,  
Risklet mil gwech va buhez, ha bet diou wech gloazet.

A bep seurd am eus gwelet, kouls en du hag en gwenn,  
Gwelet 'm eus meur a vignon o chom war an dachen ;  
War an dachen a vrezel, pa vez kriz ar c'hrogad,  
Lakat a ra da ruzia an douar gant ar gwad.

Neuze ar zoudard yaouank 'kreiz tan ar c'hanolio  
'Renk dilezel tad ha mamm 'vit monet d'ar maro ;  
Rak ar vro he deus ennan laket he holl fizians,  
Gant-se 'tla skuilha e wad evit difenn ar Frans.

Ya, trist eo an amzer-man, va mignoned kristen ;  
Kalz poaniou a renkomp holl gouzanv war an dachen ;  
'Pad an noz, e « faktion », dre glao hag amzer fall,  
E kleven an avel griz en-dro d'in o yudal.

'Vit kavout berr an amzer pa vezen e « faktion »,  
Em eus laket va spered da zével eun tamm son ;  
'Vit argas ar gwall-zonjou diwar-dro va spered,  
O veza e oan ganto noz-ha-de ankeniet.

Neuze e peden Doue da zont d'am frealzi  
Ha da rei d'in nerz-kalon 'vit gallout gouzanvi,  
'Vit herzel ouz va anken ha va foaniou kalet  
Da bere, noz kouls ha dez, siouaz, ez oun sujet.

A-barz mont da echui 'm eus c'hoant da lavaret  
E pe seurt lec'h ha gant piou ar zon-man 'zo bet graet ;  
E trancheou al « Loren » ez eo bet kompozet  
Gant eul labourer-douar deus parroz Lokeffret.

Yann RIVOAL.

Ar 15 a c'henver 1918.